

Ar paludoù-holen

Ar bloaz 2000 a c'hellfe bezañ ur bloaz hep holen e Bro-Wenrann. Lanv du an Erika a vir ouzh ar baluderien da implijout an dour-mor. Endro hag armerzh ar vro zo en arvar. E Bro-Wenrann e soñjer ne vez ket tamallet a-walc'h Total hag ar Stad.



Michel Coquard, dirak paludoù-holen e Gwenrann



Ranngalonus eo. N'eus buhez ebet er paludoù-holen.» Daniel Benisty, paluder eus Mesker, zo mantret. Un nebeud laboused a glever war vord ar silinoù met dister eo. Ha dreist-holl ne weler paluder ebet o prientiñ ar parkeier a-raok eost an hañv. Ar wech kentañ e vefe abaoe tost da 2000 bloaz. Peurliesañ e vez nerzh forzh pegement e miz Meurzh. D'ar c'houlz-se e tigor an trapoù hag e kroger da gempenn ar fardoù, an adernoù, al lagadoù... a-benn dastum holen etre miz Mezheven ha miz Gwengolo.

Met abaoe lanv du an Erika ne c'hell ket ar silinoù degemer dour-mor ken. Stankelloù douar-pri ha plouz a oa bet savet diouzhtu war-lerc'h ar peñse. Hag abaoe kreiz miz Meurzh eo difennet gant ar Prefeti implijout an dour-mor. Betek miz Mezheven e c'hellfe gortoz ar baluderien a-raok douaraat o ziriadoù. War-lerc'h e vefe re ziwzhat. Kollet e vefe an eost.

Ne ouezer ket resis betek peseurt poent eo saotret ar mor ha peseurt efedoù a c'hellfe bezañ war ar paludoù hag an holen. Da zarn vrasañ ar baluderien, koulskoude, eo gwelloc'h chom hep dastum holen eget kaout holen a berzh fall. N'eus forzh penaos e vo gwerzhet holen Gwenrann a-hed ar bloaz memestra. 30.000 tonenn zo bet miret e-kerzh ar bloavezhioù 90 gant Kenseurterezh Holen Bro-Wenrann hag un nebeud re all zo gant paluderien war o anv.

DIZEMGLEV AR BALUDERIEN

Met lod eus ar baluderien n'o doa miret tamm greunenn holen ebet. En o zouez, tud a zo o paouez en em staliañ, tud a zo oc'h heuliañ ur stummadur met ivez tud



Daniel Benisty

war ar vicher abaoe pell a zo gwelloc'h dezho gwerzhañ o eostad war an taol. «*Ar re-se ne anavezont ket ar paludoù pe ne zoujont ket ouzh istor ha spered ar vicher. Bepred ez eus bet klasket mirout un ur c'hementad bennak a holen*» eme Gerard Gilbert. «*Bloavezhioù kriz a vez. Ken kriz e oa bet etre 1981 ha 1985, da skouer, ma 'm boa paouezet gant ar vicher.*»

Ma ne vefe ket tu da zastum holen en hañv o tont e vefe paluderien ha n'o defe netra da ginnig d'o fratikoù. Pratikoù hag a c'hell

bezañ embregerezhioù bras evel Les salins du Midi. Gallout a rafent koll anezho hag ober freuz-stal. Gwelloc'h eo dezho, eta, klask ober holen daoust da berzh fall an dour-mor.

Un holen a berzh fall a zistrufje al labour hirbadus a zo bet renet abaoe 1988. Krouet e oa bet, da neuze, «*Le Groupement des Producteurs de Sel de Guérande*» gant ar C'henseurterezh evit mestroniañ heuliad an holen en e bezh. Perzh mat* ha skeudenn wiriek an holen zo brudet bremañ. War-dro 10.000 tonenn dioutañ a vez dastumet bep bloaz hag abaoe un nebeud bloavezhioù e vez degemeret un dek paluder nevez bep bloaz.

KIRIEK EO TOTAL HAG AR STAD

Evit tamall Total hag ar Stad e sav a-du an holl baluderien, ezel eus Kenseurterezh Holen Gwenrann (ennañ 175 den) pe war o anv (etre 60 ha 100 den). Digant an embregerezh e c'houlennont bezañ digollet evit ar bloavezh-labour a zo 60 milion a lurioù gounid.

Goulenn a reont ivez ma vo paeet frejoù al labourioù sevenet ganto abaoe deroù al lanv du. «*Ni hon eus graet al labour, diouzh-noz a-wechoù. N'hon eus ket gortozet ar Stad. Ret e oa ober buan*» eme vMichel Coquard, paluder evel e dad hag e dad-kozh. «*Bremañ eo ret mont pelloc'h. Ret eo kreñvaat al lezennoù ha lakaat ar werzhourien direoul da giriek. Setu perak emañ kevredigezh al labourerien vor ha Kenseurterezh Holen Bro-Wenrann o*

en arvar

labourat war an dachenn lezennel.»

Ur c'huzul evezhiañ zo bet savet. Kaout muioc'h a ziefennadurioù skiantel war saotradur ar mor zo e bal. Ennañ e kaver paluderien evel-just met ivez skiantourien eus ar CEDRE, eus an IFREMER, eus an DASS, eus ul labourva staliet er Groazig. Un emglev zo bet gant an ITOPF (strollad asurañs ar werzhourien tireoul) a zlefe paeañ ar studiadennoù hag ul lodenn eus al labourioù a zo bet graet betek-henn evit gwareziñ ar paludoù-holen.

ESTREGET AN TOURISTAÑ ZO

«Ar Stad, evel an darn vrasañ eus an dilennidi a lavar e vo mat an traoù a-benn an hañv. Ne soñjont nemet en douristelezh. Mezhus eo» a lavar Daniel Benisty. Evit gwir, disec'hiñ ar paludoù-holen a zo unan eus ar c'hudennoù brasañ a vo da zis-

koulmañ. Ma ne vefe ket tu da lakaat dour-mor da vont tre, an dour a zo er paludoù evit poent a yelo da aezhenn. Sec'hiñ ha skrailhañ a raio an douar-pri. Ne c'hellfed ket implijout anezho ken. Kinniget ez eus bet bangounellat dour-mor pell er-maez d'an Turball. Koustañ a rafe war-dro 35 milion a lurioù ha n'eo ket peursur e vefe evedus. Gallout a rafed neuze implijout dour disal ar rozioù. Daoust dezhañ bezañ marteze lousaet gant saotradurioù all e seblant bezañ an diskoulm gwellañ.

Tireoul a chom e strad ar mor, en Erika pe er-maez d'ar Groazig. Bemdez e tizoloer boulouigoù tireoul nevez. *«Ma ne vez ket graet muioc'h a draoù a-enep ar saotradur hag evit ar baluderien e c'hellfe bezañ reuz»* eme Gerard Gilbert. Ha freuz a oa bet c'hoazh gant ar broduktourien istr d'an 28 a viz C'hwevrer pa oa deuet meur a

vinistr gall da Naoned evit displegañ sav-boent ar gouarnamant. Ken tenn e oa bet an aergerlc'h e miz Meurzh pa oa bet laeret ur c'harr-samm leun a direoul eus an Erika gant paluderien. Gourdrouz a raent teurel an danvez pistirus-se ma ne vefe ket skoazellet gwelloc'h o rummad. Un nebeud devezhioù war-lerc'h e oa bet embannet gant ar Prefed an dekred a vir ouzh an dud da implijout an dour-mor. *«Ret eo kompren eo ar paludoù-holen staget ouzh istor tud Bro-Wenrann, abaoe kantadoù a vloavezhioù.»*

Solenn Georgeault

*Meur a label zo evit holen Bro-Wenrann. Ouzhpenn-se e vez kinniget ur stummadur micherel gant Kambro Kenwerzh hag Industrierezh Gwenrann ha gant ar C'hen-seurterezh.

Evit gouzout hiroc'h

Mirdi ar paludoù-holen. E Bourc'h-Baz

Dielloù, tresoù, filmoù, luc'hskeudennoù, binvioù... Muioc'h eget 1500 tra o tennañ d'ar paludoù-holen a vez kinniget d'ar weladennerien. Komprenet e vez pegen don eo levezon an holen e Bro-Wenrann.

Digor e vez ar mirdi eus ar 1añ a viz Mezheven d'an 30 a viz Gwengolo hag e-pad ar vakañsoù-skol eus 10 eur da 12 eur hag eus 3 eur g.k. da 7 eur noz. Etre miz Gwengolo ha miz Mae e vez digor da Sadorn ha da Sul hepken.

«Bretagne des marais salants : 2000 ans d'histoire».

Savet gant Gildas Buron, rener mirdi Bourc'h-Baz, ez eo al levr-se ur vengleuz a didouroù diwar-benn ar paludoù-holen e-kerzh an 2000 bloaz tremenet. An teknikoù labour, implijoù an holen, ar stourm a-enep an taos a oa war an holen a zo displeget ennañ. Kavet e vez kalzik a draoù diwar-benn ar brezhoneg a veze implijet gant ar baluderien. Arbennigour war an dra-se eo an istorour Gildas Buron a blij dezhañ lavaret eo chomet liv ar brezhoneg war vicher ar paludoù-holen hiziv an deiz.

«Bretagne des marais salants : 2000 ans d'histoire». Embannet gant Skol Vreizh, 176 p., 200 lur.

Diouzhtu war-lerc'h peñse an Erika e oa bet savet stankelloù douar-pri ha plouz dirak ar paludoù-holen evit mirout ouzh an dour-mor lousaet da vont tre.

